

Bourdoulous (?)

Bet embannet e 1902.

Taolenn

Ar haz hag ar bugel

Ar bik, ar goulmig hag ar paun.

Ar haz hag ar bugel

Yez Treger

War don : Petra 'zo nevez en Kêr-Iz.

Eur bugel war dreujo an ti
'Oa en goaze o tibri ;
Gantañ en e zorn eur grampouenn
Hag eur haz bihan 'n e gichenn.

Ar haz 'ra fistoulig ken brao,
Ken flourig eh astenn e bao
Ma kav d'ar bugel 'n-eus ar haz
En e geñver karantez vraz.

Sed ar bugel kavet gantañ
Eur mignon euz ar re wellañ !
Ha kenkent e rann e grampouezenn
Da reiñ d'ar hazig eur lodenn...

Ar haz liper, pa 'n-eus tapet
An tamm 'nevoa c'hoant da gaved,
Raktal e tro kein d'ar bugel,
Ha gand e damm e teh pell-pell.

Neuze at bugel difaziet
D'ar haz 'oe klevet o lared :
« D'ar hrampouezenn eo e oas mignon,
Ha n'e' ket din-me, ampoezon ! »

Ar bik, ar goulmig hag ar paun.

War don : Petra 'zo nevez e Kêr-Iz ?

Eun deiz, eur bik hag eur goulm wenn
O-doa bet lakaet en o fenn
Mond d'ober eur gwel karanteg
D'an aotrou paun, o amezeg.

An aotrou, kerkent ha ma wel
O tostaad an diou zimezell,
A ya d'o haoud prim ha seder
Da zigor deze dor e vaner.

Goude eur pennadig bizit,
Ar bik, ar goulm, a yeas kuit ;
Hag, en eur vond d'ar gêr, ar bik
N'e' ket pell heb lared grik¹.

Ar gaoz war ar paun a lakaas :
« Gwelet az-teus e ziou holvaz ?
O ! pebez treid, ha pebez mouez !
Roi peuh e tlefe, gand ar vez ! »

« Me 'oar mad, eme ar goulmig,
Ne gan ket koulz hag eun eostig ;
Med a-hend-all n'e' ket e vouez
Ken divalo hag a larez.

N'ouzon ket, evid e zaou bao,
Pe int 'zo vil, pe int 'zo brao :
'Hed ar vizit, ma daoulagad
War e vleo a bare dalhmad.

O vond war nij a-dreuz ar bed,
Em-eus gwelet traou kaer meurbed,
Ha bleo ar paun e' kaerrañ tra
Em-eus gwelet beteg bremañ. »

Tud 'vel ar goulm, e gwirione',
Gwall stank ne gavet ket aneze ;
Bemdez avad 'weler kalzig
O kemer patrom ouz ar bik.

An dan ha, dreist-oll, ar hristen
A dle ober 'vel ar goulm wenn :
Evelti diwallom eta
Da zroug-prezeg euz an nesa !

¹ lared grik : lavared eur gomz.

